

Lidañ a ra Enercoop Breizh he femp bloaz ha treiñ div bajenn eus he lec'hienn internet e brezhoneg da geñver Gouel Breizh



Enercoop ha Breizh

Ur pourvezer tredan 100% nevezadus eo Enercoop, evel ma z'eus meur a hini anezhe hiziv an deiz. Padal ez eus meur a zibarder dezhañ : prenañ an tredan dre gevratou sinet war-eeun gant ar broduerien pergen, ar statud kevelourel ha bezañ diazezet er vro dreist-holl. Strewiñ a ra Enercoop he fatrom war Rannvro Breizh a-benn krouiñ ul liamm eeun etre ar broduerien hag ar vevezerien hag aesaat ma vo adperc'hennet an energiezh gant ar geodedourien.

Da geñver Gouel Breizh 2016 he doa lakaet Enercoop Breizh treiñ e brezhoneg he skritelloù ha he follennoù-nij. « *Ken brav eo bet degemeret ar skorioù kehentiñ nevez-se ken m'eo bet ret deomp kreñvaat c'hoazh hor c'harantez evit sevenadur Breizh* » a zispleg Nicolas Debray, Renner Enercoop Breizh.

EOG Treiñ

E 2017 e teu war wel ar soñj treiñ e brezhoneg meur a bajenn eus al lec'hienn internet. E fin ar bloaz e kinnig Patrice Marquand, eus EOG Treiñ, e servijoù deomp. Ken aes ha tra eo bet degemeret e ginnig rak EOG Treiñ zo ezel eus ar gevelouri obererezhioù hag implij Chrysalide hag arval da Enercoop war un dro. D'ar muiañ e vez dibabet ar burchaserien dre an talvoudegezhioù rannet gante : frammoù lec'hel, kevelourel, denel...

A-hend-all e fell da EOG Treiñ kas ar brezhoneg war-raok en embregerezhioù ha skoazellañ anezhe pa reont gant ar brezhoneg. Evit Patrice Marquand, « *eo stag dazont ar brezhoneg ouzh e gelenn, e dreuzkas, e bleustr sokial met ivez ouzh ar fed ma vo gwelet hag anavezet e bed an ekonomiezh. Pa vez Enercoop hag embregerezhioù all engouestlet evit ar brezhoneg, sed aze ur galv dispar d'an holl Vretoned da adperc'hennañ o yezh.* »

Bilañs

Abaoe pemp bloaz e vez kontet e-touez 5 300 arval ar gevelouri : Rannvro Breizh, Departamant Il-ha-Gwilen, Brest Meurgêr, kêr An Oriant pergen...

1700 kevelour o deus postet arc'hant e raktres Enercoop Breizh. D'an 9 a viz Even a zeu e vo kinniget dezhe ar bilañs 2017 er vodadeg-veur e Tremargad (22).

E miz Gwengolo 2018 e pedo ar gevelouri he c'hevelourien ha hec'h arvalien da lidañ he femp bloaz en un doare laouenek en ur stal arval da Enercoop, en ul lec'h dalc'het kuzh evit poent.

Gant ar pal tizhout 10 000 arval e 2020 e kendalc'h Enercoop da vont war-raok, heñchet bepred gant ar youl talvoudekaat he dibarderioù breizhat.

Diwar-benn Enercoop

Ur pourvezer tredan 100% nevezadus ha kevelourel eo Enercoop, gantañ un difrae sevel rouedadoù nes. Abaoe m'eo bet krouet e 2005 en deus da gefridi brudañ ha diorren an energiezhioù nevezadus, broudañ ar geodedourien da vestroniañ ar bevezerezh energiezh ha harpañ anezhe da berc'hennañ kraf an energiezh. Kinnig a ra Enercoop pourvezañ tredañ diwar prenañ digant produerien energiezhioù nevezadus. Sevel a ra binvioù evit mestroniañ ar goulenn tredan. 10 kevelouri a ya d'ober ar rouedad Enercoop. Aozet eo diwar pennaennoù ur gouarnerezh rannet, sklaer ha demokratel. Skoazellañ a ra raktresoù keodedel padus en tiriadoù. D'ar 1añ a viz Genver 2018 ez eus 53 000 arval, 29 000 kevelour, 170 produer ha 150 goprad e rouedad kevelourioù Enercoop. Mont a ya war vrasaat hiziv an deiz a-benn sevel gant an holl hag evit an holl ur bed energetek nevez.

Diwar-benn EOG Treiñ

EOG Treiñ eo an ajañs treiñ e brezhoneg nemeti a labour da gentañ evit an embregerezhioù hag ar gennad prevez. Tapet gantañ un doktorelezh war ar brezhoneg hag ar c'heltieg e kinnig Patrice Marquand e varregezhioù war ar yezh evit treiñ e brezhoneg skorioù kehentiñ ha teulioù a bep seurt war an tachennoù-mañ :

- Touristerezh, glad, sevenadur.
- Kehentiñ, embann, liesvedia.
- Kenwerzh, artizanerezh, greanterezh.

Darempredoù gant ar mediaoù

Marie Jaillard-Seffals - 02 99 35 69 44 - marie.jaillard@bretagne.enercoop.fr

Patrice Marquand - 02 98 93 87 86 - patrice@eog-traduction.bzh